

AN DISTRO

Barzoneg  
E.Ar ROUZ

Ton  
F.DANNO

$\text{♩} = 70$

Mignon, pa vo deut an distro Em mamm-vro,

Eh in da vale hed an ed leh ma red ar had rouz

Ha, gand trouz, Dre oll e savo klujiri En dro din

Me 'h ay pa vo tpm an amzer, dibreder, Da draoñ ar vilin

da neuial. Gweled rin an ebeul vond da heul E.vamm en eur be-

-varlammad barz ar prad

Peb gwir miret striz

Mignon, pa vo deut an distro  
 Em mamm-vro,  
 Eh in da vale hed an ed  
 Leh ma red  
 Ar had rouz,  
 Ha, gand trouz,  
 Dre oll e savo klujiri  
 En dro din.  
 Me 'h ay pa vo tomm an amzer  
 Dibreder,  
 Da draoñ ar vili<sup>n</sup> da neuial  
 Ha gedal  
 An ebeul 'vond da heul  
 E vamm en eur bevarlammad  
 Barz ar prad.

Kuzet dreg eun torkad aozill  
 Gand va skrill,  
 Dluzed ha brelled a dapin  
 'N eur c'hoari  
 Hag eno  
 Me 'welo  
 Ar goulm o klask eur melezour  
 Er roudour.  
 Me a rayo deuz va gwella  
 D'endramma  
 Ar gwiniz melen evel aour  
 Hag ar paour  
 Gand e verh, war va lerh,  
 Tanvouezennou hello kutuill  
 Didrubuill.

Me 'h ay beteg stank ar c'hoad don  
 Dispouren,  
 Ma tosta ar gannerez-noz  
 D'he gortoz  
 Me 'chomo  
 Ha ma sko,  
 E stlapin kerkent he golvaz  
 Dreist ar waz!  
 Birvi ra karantez a-leiz  
 En va hreiz.  
 Me 'h ay dizale plen ha brao  
 D'hen ansao goustadig  
 Da Soazig  
 Mignon na pegen kaer a vo  
 An distro!